

Kergourlez Gwillou : **BITEKLE** pe war hent ar Baradoz

Fañch

A-benn ar fin ! Eun ti 'leh vo moien din torri ma zehed ! O krevi gand ar zehed emañ ! Salud !

An tavarour

Salud !

Fañch

Ah ! Kement-ha-kement hag am-eus kerzet war an hent du-ze ! Kredet ha kredet 'mije kavet ti digor ebed ! Ha kaoud sehed kemend-all ! O gast de die ! E ! diskennit eur banne traou 'ta ! 'Maon o vervel ! Mersi deoh. Vad a ra d'an den ! An tamm maouez daonet-se 'defe laosket ahanon da zizehi. « Frazi, laren dezi, hastit buan ! Kit da gerhad peadra da eva din, forz petra, banne rom, 'maon o krevi... » — « Dioustu, ma dousig » , a respontas din. Fañch 'vez greet deuzon, med hi 'ra “ma dousig” deuzon. « Med... kerzit buan » , a hopen dezi. « Ha paz dour benniget, gwir dour-avalou a zegas nerz d'eur hristen ! » Amzer dezi laoskel he chapeled, lakaad he botou-koad ha dilezel he litaniou, setu-hi 'mêz. « Ha kerzit fonnuz, ma yarig », a hopen dezi. “Frazi” 'vez greet diouti, med me ra “ma yarig” deusti dalhmad, 'ouian ket perag... Ma ! N'eus nemed an hent da dreuzi 'vid beza 'barz 'n ostaliri en tu all. Gortoz a ran eur pennad... hag eur pennad all c'hoaz ? Petra 'ma-hi 'h ober ? a zoñjan. Fin gortoz a ran eur momed c'hoaz. Ha neuze : kaoh ! M'on ket evid herzel ken. Sevel a ran 'mêz ma gwele. Mond a ran eun tammig war-raog 'vid gervel. Eul lagad 'mêz an ti, daou, tri, du an noz. Kristen 'bed da weled ahanon. Mond a ran eun tammig war-raog 'vid gervel. Eun troad... Daou droad, ha me er-mêz. Klag ! Serret an nor ! A ! Setu-me paket brao : er-mêz ! War va lostenn ! Ma alhwez 'barz ma chakod, ma chakod 'barz ma bragou ha ma bragou 'barz an ti ! 'Dreñv an nor. Ha tu ebed ken dond tre. Klask a ran. Troi a ran ma hein. Tastorn a ran. An nor ?... Toull-dor ebed ken ! Ar voger ?... Moger ebed ken ! An ti ? Ti ebed ken. 'Tra 'med brumenn hed-ha-hed. Êzenn-Doue ! 'zoñjan. Ha sehed ganin bepred. Gervel a ran, hopal a ran, hopadenn 'bed ! Gloan ! Kollet lip ! Setu-me propr gand an amezeien 'zo sañset dond da veilla ahanon henoz ! A ya, ankouaet 'm-eus da lared deoh : o vervel 'maon ! Fin, tost da vervel, kwa ! Daou zevez ha diou nozvez 'zo emeur o veilla ahanon dija gand goulaouennou, beuz, dour benniget, ha toud an tralala. Foutu kwa ! Peseurt penn a raio an amezeien ? War ma

lostenn, fin : me, war lostenn ma roched, gwenn-toud. 'Kreiz ar vrumenn !
Ha sehed dalhmad ! Erfin en em lakaad a ran da gerzed ha da gerzed. Of !
'ouian ket pegeid amzer 'zo emañ o kerzed. E mod-se... 'Fin, amañ 'maon
digouezet ha chañs braz din d'en em gavoud 'barz eun ostaleri.

An tavarnour

Chañs vraz deoh, ya.

Fañch

E ! Diskennit din eur banne all 'ta.

An tavarnour

Marteze 'vefe bet gwelloc'h deoh chom 'barz ar gêr.

Fañch

A ? Sur 'm-eus kerzet kalz, kar n'anavezan ket an ti-mañ tamm ebed. Ha
koulskoude n'eus ostaliri 'bed e leh ne vijen ket bet eur wech d'an nebeuta,
ugent leo tro-dro. 'Baoe an amzer 'prenan saout ! Marhadour saout eo ma
micher, 'fin e oa, a-raog din boud klañv. Se 'zo kaoz 'm-bez sehed dalhmad,
kompren 'rit ? Gast ! Ma arhant ! Ankouet 'm-eus ma chakodou 'barz gêr.

An tavarnour

Evid netra eo.

Fañch

Evid netra ! Eun ti extra neuze ? ... Eurejet 'peus unan euz ho pugale ? Eur
vadiziant, pe... eur gomunion ? Evid eur wech 'maon kouezet an devez mad.
Sapre chañs din... !

An tavarnour

Sapre chañs deoh, ya ! Amañ 'vez servichet bemdeiz evid netra.

Fañch

Bemdeiz 'vid netra ? Me 'gave a-walh oa tres drol warnoh ivez... Med larit
din : ma vez servichet amañ bemdeiz evid netra, 'barz peleh 'maon ?

An tavarnour

'Barz Bitekle.

Fañch

Bitekles ?

An tavarnour

Ya, Bitekle. 'Peus ket bet klevet preg biskoaz euz Bitekle, ostaleri an
hanter-hent ?

Fañch

Eo, eo... C'hwi 'zo eur sapre farser, c'hwi ! C'hwi zo eur sapre farser... Bitekle... Bitekle. O ! E heller c'hoarzin eur wech an amzer. Tra nemed gweled ho penn e soñjen : « hennez eo unan hag a blij dezañ farsal », Bitekle ! Neuze... amañ 'ma Bitekle.

An tavarneur

Amañ 'ma. Kant ostaliri 'zo deuz an douar beteg ar baradoz ha Bitekle 'zo 'barz ar hreiz : an hanter-kantved.

Fañch

Med... neuze, on maro !

Edouard

Ah ! Med Fañch eo.

Fañch

Med... Mar deo an hanter-kantved amañ, peseurt mod gand ar fri n'am-eus ket gwelet, pe d'an nebeuta bleuet ar c'hwez d'an nao ostaliri ha daou-ugent a oa a-raog ?

Edouard

Oh ! 'Faota ket en em jala ! Pep hini, c'hwi oar, a vez sañset dezañ lonka e walh a-raog en em gaoud er baradoz. Ar pezh a vez evet ez-veo vo kement-se nebeutoh da lonka pa ver maro. Ar re en em gav amañ dioustu 'zo ral a wech tud o chom gand o c'hoant ez-veo.

Fañch

'Oa ket pres warnon. Gellet 'mije ober e-giz toud an dud : komañs gand an ostaliri genta.

Edouard

O ! Paotr paour ! Maro 'vefeh diwar hirnez, gand hirnez ha gand sehed. Klianted an ostaliri genta n'int ket tud frekantabl. Everien lêz, sunerien skorn. Ar groaz hlaz hag ar groaz aour ! Amañ 'maoh kouezet mad : amañ 'vez servichet lagoud-jistr, lambig a-feson, wiski-skotch... ha kognak ! Evid ar re greñv ! A-wechou 'vez dañset ar gavotenn, ar skotich, ar java, an dañsou modern, kov-ha-kov. E ! Vichy-Fraise ! Eun taol-vals ! A ! sapre Fañch !

Fañch

Sapre Fañch ! Peseurt mod 'anavezit ahanon ?

Edouard

Gwelet 'm-eus ahanoh pa oah babig c'hoaz. Mod-se ! Edouard. Edouard ?
Me eo Edouard. 'Oah ket brasoh 'vid eul lutun-noz pa dorren kraoñ-gell
deoh dija. Ha ma gwreg 'oa yaouank. Frazi oa heh ano, ha me zo Edouard.

Fañch

Ha neuze, c'hwi eo Edouard ? Ha peseurt mod 'maoh amañ 'ta ?

Edouard

Abalamour m'on maro evel just !

Fañch

Abalamour m'oh maro ?

Edouard

Ha c'hwi 'zo ivez.

Fañch

Me ivez ! O ! Jezus ma Doue !

Edouard

Lonkit. 'Maoh ket o vond da fagani bremañ. Maro oh !... Setu... N'eo ket
ken stard-se, eo ? Setu... Evit !

Fañch

Ma gwreg... Maro on... Ma gwreg ! Sur ema gand ar glahar. Hag ar rom ne
vo ket evet ! Eo... Evet vo gand an amezeien. Med, larit din, Edouard, peseurt
mod 'maoh amañ c'hoaz ? Abaoe keid-all oh maro ?

Edouard

An amzer ! An eternite !

Fañch

Pemzeg vloaz dija.

Edouard

Pemzeg vloaz, eun eternite ! ... Ped sizunvez 'ra pemzeg vloaz ?

Fañch

Perag 'ta ? Ped sizunvez 'ra pemzeg vloaz ? Pemzeg vloaz zo eur bern
anezo. Se zo kalz anezo ! O ! ya se zo...

Edouard

Tavarnour ? Ped sizunvez 'ra pemzeg vloaz ?

An tavarnour

Seiz-kant pevar-ugent.

Edouard

Seiz-kant sadorn ha pevar-ugent.

Fañch

A ! ya... Seiz-kant sadorn ha pevar-ugent. E ! Edouard ! Med perag emaoñ o konta dre zadornveziou ivez ?

Edouard

Beb sadorn noz, e ra Sant Per tro an ostaliriou gand e garrigell. « Tud evid ar baradoz ? » a hopa. « 'Barz ar garrigell ». Neuze an oll re 'zo gouest da jom en o zao a ya 'barz ar garrigell... Me n'on ket deuet a-benn gwech ebed c'hoaz. Abaoe pemzeg vloaz ! O ! klevet a ran anezañ mad-tre ; gwechou 'zo memez, e teuan a-benn da weled anezañ, pa lak e benn e toull an nor, med ma divesker an hini eo. Ma divesker ne gerzont ket ken pa paseer ar zizunvez amañ o selled ouz toud ar boutailadou-ze... d'ar zadorn, an divesker... Amzer a-walh din da zevel... Hag e vez degouezet al lun ! E ! tavnour ! Peseurt devez om hirio ?

An tavnour

Al lun.

Edouard

A ! ya, al lun. Da lun e ya mad-tre... ! Da lun e choman en ma zav. Neuze, beb lun, 'giz hirio, e lakan 'barz ma zoñj paz eva ken james. Hag e touan. Derhel a ran eun devez, daou zevez. Hag e soñjan : Edouard, deuet eo ganeoh. 'Benn disadorn, yeoh d'ar baradoz ! 'Benn disadorn ! 'Benn disadorn ! Gortoz ar zadorn amañ he ober netra dirag an oll voutailadou-ze ! A-greiz-toud e teu du ma spered. Frazi, 'zoñjan. Frazi ! Ma gwreg. A ! Frazi ! 'Petra ra Frazi ?

Fañch

A ! Frazi !

Edouard

Frazi ! Intañvez ! Dour en he daoulagad er poent-mañ, 'zoñjan, ema o selled ouz ma foltred... !

Fañch

Ho poltred !

Edouard

Sehi 'ra he daoulagad. Ha me ivez. A !... Bremañ, e welan anezi o lared he chapeled hag o vond da lakaad bleuniou war ma bez...

Fañch

Gozoud a rit, Frazi...

Edouard

Gweled a ran anezi o treuzi ar blasenn, gwisket du. Kosaet he-deus eun tammig. Gwennaet eo he fas dindan he beill hir ha du. Uzet eo he broz ganti dre forz boud netaet ha feret. A ! Med mond a ra e-biou, paour, uhel he fenn ganti ha fidel, ha fidel bepred ! A ! Frazi !... Neuze n'on ket evid herzel mui. Ha da verher, devez he deiz-ha-bloaz...

Fañch

Da verher ?

Edouard

Ya, ma gwreg zo bet ganet da verher.

Fañch

A ! ya...

Edouard

Degouezet ar merher, gand an daelou 'm-eus skuillet, aze e teu sehed din. N'on ket evid herzel ken. Neuze e tiskennan eur werennad, eur werennad vihan nemedken. Me 'dapa anezi ma-unan. Mad eo. Bravoh eo din. Dond 'ra ar startijenn din en-dro... Ha d'ar yaou e ya mad-tre. Daou zevez c'hoaz, a zoñjan, hag e tegouezo d'ar zadorn ha 'benn disadorn 'yan d'ar baradoz. Hag en em zantan treh. Eur paz-dañs, en em lakan da huñvreal. Da huñvreal er baradoz : ar baradoz eun dachenn hlaz gand êlez, ha dindan al lagad-bleiz merhed bihan, stered gwer tro dezo ; ha war eur gador wenn, ar Werhez Vari o selled deuston o tond a-bell, ha Sant Edouard, sant patron din-me. Hag eñ da gonta ma fegement din : « Ha bremañ 'maoh o tigouezoud ? Lonker brein ! » Ya ! Sant Edouard a anavez ahanon mad-tre, med me a anavez anezañ ivez. 'Respontan ket, ne laran ket netra, me lez anezañ da hopal ha neuze ma zant patron Edouard... ahanon, a lavar din : « Ale Edouard, deuit da ziskenn unan ganin », ha me da heul heb ober ardou na rebechou. Me d'ar hontouer gantañ, eur sapre mell kontouer, gand boutailladou 'giz 'vez gwelet nemed 'barz foar-diskouez. Neuze, en em lakan da eva. Tremen a ra an Aotrou Doue aze e-giz toud an dud. An Aotrou Doue a gav dezañ eo normal gweled ahanon harpet ouz ar hontouer. Eüruz on : degouezet eo ar gwener. Med da zadorn an divesker, an tamm divesker brein-ze ! Neuze en em skandalan ! Tra vreïn Edouard ! Tra vreïn ! 'Maoh nemed eun dra vreïn, Edouard ! P'ema Frazi o poania noz-deiz evid lakaad overennou evid hoh ene, ha c'hwi o chom amañ da lonka e-giz eur hozak ! Azeza a ran, keuz leun ma spered. Ha neuze n'on ket evid sevel. Tremen 'ra

Sant Per gand e garrigell. Toud an dud a ya kuit ha me a jom amañ. En em lakaad a ran da ouela, ha neuze da gousked. Degouezet eo ar zul. Ha pa zihunan, 'vez degouezet al lun.

Fañch

Frazi, 'laren deoh...

Edouard

A ya, Frazi gêz ! Peseurt mod 'ma-hi ?

Fañch

Paz re fall, mersi... ! Eureujet he-deus en-dro.

Edouard

Hañ...

Fañch

Eureujet eo en-dro.

Edouard

E ! tavnour : eur banne rom ! Daou vanne rom ! Tri banne rom ! Lakit tri banne rom ! E ! Vichy-fraise ! Dihun 'ta ! Ma gwreg zo eureujet en-dro ! Ha me o tremen.... ma baradoz amañ o kredi oa chomet intañvez !

Fañch

Hag eo chomet eur wech c'hoaz.

Edouard

Hañ ! Petra a gontit ? Eureujet eo pe n'eo ket ?

Fañch

Eureujet eo bet en-dro. Ya, med dre m'ema maro he eil pried...

Edouard

Maro eo ? Gwell-a-ze !

Fañch

Me an hini oa.

Edouard

A ! A ! Sapre Fañch.

Fañch

Piou eo hemañ ?

Edouard

Vichy-Fraise.

Fañch

Vichy-Fraise ?

Edouard

Ya, Vichy-fraise. Marvet da dri bloaz ha tregont, abalamour d'ar boeson. Koulskoude n'e-neus evet nemed Vichy-Fraise a-hed e vuhez. Eur paotr euz kêr. Jañdarm 'oa. Hag unan a anavez ar vals.

Fañch

????

Edouard

Tralalalalalala. N'anavezit ket ?

Fañch

????

Edouard

'M-eus ket soñj euz e ano bihan ken. Arsen, 'gav din. Ne vern ket. Vichy-Fraise 'vez greet deustañ, Vichy-Fraise. D'ar mintin, pa zave, d'an ostaleri genta e yee dre guz da eva eun banne pastis ! D'ar paotr kenta a wele, e lare : « Unan 'vo taolet ? » Ha ma responte : « Ma... Ar wech diweza 'm-eus bet eur bannig Vichy-Fraise. O !... an taol-mañ 'mo eur bannig pastis. » Ha neuze pa en em gave gand unan all, memez mod : « Petra 'po ? » « Hañ ! an taol diweza 'm-eus bet eur bannig Vichy-Fraise, an taol-mañ 'mo eur bannig pastis. » An trede memez mod : “ « Petra 'po ? » - An taolig diweza 'm-eus bet eur bannig Vichy-Fraise, an taol-mañ 'mo eur bannig pastis ». Hag ugent gwech bemdez eur bannig Vichy-Fraise, eur bannig pastis, Vichy-Fraise, pastis... Med diouz ar pezh a lare 'n-eus evet nemed Vichy-Fraise a-hed e vuhez anezañ...

Fañch

Fentuz eo ! Fentuz eo !

Edouard

Ya, fentuz eo... Peseurt mod 'ma-hi ?

Fañch

Peseurt mod 'ma-hi ? Piou ?

Edouard

Frazi.

Fañch

C'hwi oar...

Edouard

Kaozeal a ree deoh deuston a-wechou ?

Fañch

Aliez.

Edouard

Petra a lare-hi ?

Fañch

Traou.

Edouard

Peseurt traou ?

Fañch

Traou... Traou jentil.

Edouard

Jentil 'vid piou ?

Fañch

Se 'zepante. Gwechou 'zo e lare din heb aon he-doa keuz deustoh.

Edouard

Frazi a lare se deoh ?

Fañch

Ya, pa veze en imor fall a-eneb din.

Edouard

Neuze e oa terrupl ?

Fañch

Gwasoh evid terrupl. Mond a ree da gerhad ho poltred da lakaad anezañ a-istribill a-uz d'am gwele. Ha neuze kompren 'rit, me 'oan ket 'vid en em vired da zoñjal ennoh !

Edouard

Hag hi, petra 'ree ?

Fañch

E ! kousked ha dirohal... Neuze, me, evel just, 'oan ket 'vid kousked ken. Setu 'kreiz an noz e saven war begou ma zreid, evid nompaz dihuni anezi, da ziskourra ho poltred hag e lakaen anezañ en armel, a-dreñv ar pakad liñseriou.

Edouard

A ! ya, en armel a-dreñv ar pakad liñseriou ! Me ! 'Dreñv eur pakad liñseriou !

Fañch

Ya, med... oan ket evid kousked !

Edouard

Ale, ne heller ket gouzoud. Ha me, amañ, koz-inosant oh ober bil o soñjal em gwreg du-ze, o ouela dalhmad. Koz-inosant ! Kas hemañ d'an traoñ ! C'hwi ! Petra 'po c'hwi ?

Vichy-Fraise

Beñ ! An wech diweza 'm-oa bet eur banne Vichy-Fraise. An wech-mañ, 'mo eur banne pastis...

Edouard

Eur banne pastis ! Ha goude-ze, e teskoh deom ar vals... Hañ... ar vals...

Fañch

Edouard ! ... Pa zoñjan... Piou zo o vond da gaoud anezi pa vo maro ?

Edouard

Piou ? ... Piou 'zo o vond da gaoud piou ?

Fañch

Piou zo o vond da gaoud anezi, kea ?

Edouard

Ya, med piou ?

Fañch

Piou ? Piou ? Piou zo o vond da gaoud piou ? Frazi evel just !

Edouard

A ya, Frazi ! Se ne ouian ket.

Fañch

Kar ne vefe ket gwall normal dezi derhel daou bried memestra.

Edouard

A ! nann. Ne vefe ket gwall-gristen, dreist-oll er baradoz.

Fañch

Da lared ar wirionez, n'eo ket eur gudenn c'hoaz. Pa n'om ket degouezet eno c'hoaz.

Edouard

Eno ? Peleh 'ta ?

Fañch

Eno du-ze. 'Barz ar baradoz.

Edouard

A ! ya, gwir eo... En em houlen a ran bepred perag n'eus ket moien da en em vired da gaozeal 'vid kaozeal ?

Fañch

Da lared eo ?

Edouard

Da lared eo ? 'M-eus aon e zo eun dra n'on ket evid kompren toutafed.

Fañch

Ha petra 'ta ?

Edouard

Perag eur vaouez fier ha koantig e-giz oa Frazi, oa eet d'en em daol etre divreh eur paotr 'gistoh ? Petra 'oah 'barz ar vuhez, c'hwi ?

Fañch

Petra 'oan ? Ya.

Edouard

Eur marhadour-saout !

Fañch

Edouard ! Abaoe re amzer 'maom ha re a jopinadou on-eus evet asamblez evid ma teufeh a-benn da lakaad ahanon en imor fall. Med gwelloh eo deoh derhel ho teod e-barz ho potez, a-hend-all, marteze ne hellin ket en em vired da lared traou 'zo ha n'int ket bet klevet gand diskouarn eun den bouzar, ma faota deoh gozoud. A ! ya, traou 'zo.

Edouard

Ha peseurt traou 'ta ?

Fañch

Traou hag a zo gwir. Ar paour-kêz Frazi ! Kontet he-deus bep seurt din.

Edouard

A ! ya... Kontet he-deus bep seurt deoh, ha ma he-deus kontet traou ha n'int ket gwir ? Frazi 'zo eur haouerez.

Fañch

Kontet he-deus... peseurt mod e lezeh anezi heh-eunig deuz beure d'ober war-dro ar hafe 'ta ma chomeh-c'hwi 'barz ho kwele !

Edouard

'Oa ket dao dezi mond da gonta an traou-ze deoh ! Gouzoud a ouie mad-tre ha ne oan ket evid sevel buan-buan da vintin. A-hend-all ar gwad a ziskenne em zreid ha lak ma fenn da drei. Red eo din sevel tamm-ha-tamm heb en em enervi. Abalamour 'm-eus gwad re domm.

Fañch

Gwad re domm ! 'Vid selled ouz ar merhed, ya, med n'eo ket evid labourad. Ha stard eo bet da Frazi ganeoh ! C'hweza-beo bemdeiz, o voueta ar moh pe o frota boutonou jiletenn an Aotrou 'vid ma lugernfent da zul, o poania dindan heol tomm, tra ma chomeh-c'hwi en disheol gand eur voutaill o tilostad arikoïou pe o tigliorad piz-bihan.

Edouard

An heol a ra droug-penn din. Abalamour d'eun taol 'm-oa bet pa oan bihan, o koueza euz ma havell.

Fañch

Ha diouz ar goañv neuze ? Daoust hag e veze heol ivez ? Piou eo a yee dindan glao miz here da droha deliou ar haol gleb adaleg krogenn he hein tre beteg bizied he zreid ? Tra ma chomeh-c'hwi, el leh seh ha tomm, oh eva grog !

Edouard

Ya eur wall-vroñchid chomet ganin abaoe ma hoñje.

Fañch

'Benn 'fin eur paotr gistoh, 'oa nemed da zul hag e veze yah. A ! D'ar zul vintin ! 'Barz ostaliri plasenn an neh ! Aze n'eo ket ar memestra den ken. Piou bennag e-nije bet tu da gleved anezañ euz an tu all d'ar blasenn, e-nije

bet tu da gredi e oa 'barz an ostaleri an den kreñva, kaloneka, ha speredeka er bed. Aze, e troe deveziou-arad, me lavar deoh, hag e trese ar hezeg, hag e lakae an oll da gerzed : lieutenanted, adjudanted, komadanted ha koloneled memez. Adlakaad a ree urz 'barz ar vro, ren a ree ar finañs, lakaad a ree kempouez war ar politik ! Ha neuze e save eur bed dezañ e-unan etre fin an overenn hag unneg eur noz, 'barz ostaliri plasenn an neh, fas d'an iliz. Med pa oa poent deoh mond d'ar gêr, piou a douge ahanoh d'ho kwele ? War he hein, Edouard, he femoh braz ? Ha piou a lakae ahanoh d'ho kwele 'leh koueza e-giz eur zahad bleud ? Piou 'oa ? Lar din piou ? Piou 'oa ? Piou ? Piou ?

Edouard

Frazi !

Fañch

Frazi an hini 'oa, ya ! Frazi, an hini vad, an hini dous, an hini basiant. Eureujet, reor gaoh ma'z oh, d'eur marhadour-saout, dirag aoter or Mamm Santel an Iliz, goude beza bet chomet gand he gwaz kenta er mizer du ha kriz abalamour dezañ beza eur feneant brein.

Edouard

Kriz oh ganin, Fañch... N'oa ket dao dezi mond da gonta traou mod-se memestra. 'Oa ket traou da gonta !

Fañch

Na d'ober !

Edouard

O ! ya, med, spi 'm-eus he-do ar binijenn hir 'vid ar binijenn hir evid ar govesadenn-ze ! Chañs dezi paz en em gaoud dirag ahanon a-raog pell ! Ha chañs dezi da gaoud eun trede gwaz da reñka he hostezennou dezi e-giz 'faot !

Fañch

Frazi !

Edouard

O ! Gast ar hast !

Fañch

Frazi !

Edouard

Frazi an hini eo ya, du-pod, ha grehallet e-giz eun aval-douar, unan a zo

chomet e-pad ar goañv 'barz ar hraou, unan ha n'eo ket bet debret gand ar razed c'hoaz anezi ! Dalhit ahanon, Fañch, a-hend-all eh an dezi !

Fañch

Faota ket deoh en em enervi ! Lezit ahanon, me 'zo 'vond da gaozeal ganti ! C'hwi 'welo !

Ha neuze, Frazi ! Ma yarig ! Deuet oh a-benn ar fin ! Ha greet 'peus eur veaj vad, c'hwi ivez ?

Frazi

Hag am-eus ! Gweled a rit, n'eo ket ?

Edouard

Ha neuze, anavezit ahanon ivez. Ale, gortozit, d'am zro ema bremañ. Me 'zo o vond da gaozeal outi. Ha neuze Frazi... Soñj 'peus ahanon c'hoaz ?

Frazi

O dam ya ! Eur zoñj mad 'm-eus ahanoh ! Hag ahanoh ho-taou ! C'hwi atao, ho chik melen o red 'mêz ho peg war ho kroñch, hag egile gand e zaoulin gil, hag e lagad ruz o lucha war e fri brulu !

Edouard

N'eus ket cheñchet kalz anezi ! Kosaet he-deus eun tammig, med n'eus ket cheñchet kalz anezi !

Fañch

Din ahanon an hini eo !

Just a-walh Frazi, o kaozeal diwar ho penn e oam on-daou hag e oam o lared... hag-eñ e teufe Frazi pe ne deufe ket.

Edouard

Setu ! Ni oa o hortoz eun tammig sar eva eur bannig... Fin eva eur bannig sar gortoz eun tammig hag o soñjal daoust hag e teuio pe 'deuio ket... Nehet 'oam toud abalamour deoh.

Edouard

Hag e oam ! Ya, 'oam o soñjal marteze bet eet e-biou heb gweled ahanom, hep taol evez ouzom. Ha just neuze oh deuet tre.

Frazi

'Oa ket dañjer mond e-biou hep klevet gand an trouz a rit ho-taou. Ne vez klevet nemedoh azaleg dor ar eternite ! Daou lapous-noz oh !

Fañch

Ma yarig !

Frazi

Ho yar-gloch a lavar deoh serri ho peg !

Edouard

Ne ouezit ket kaozeal d'ar merhed. Me 'zo o vond da zisplega an traou dezi, gortoz. Frazi ! Frazi ! Edouard eo, Ho kwaz kenta ! Ha gwechall, p'am-eus anavezet ahanoh, 'oah eur plah vrao, koantig. Ha bremañ emaoñ deuet da veza koz, du ha grehellet. O ! Med ne vern ket. N'eus netra cheñchet etrezom.

Frazi

Setu aze komplimañchou, me lavar deoh, geriou brao 'ta ! N'eus netra cheñchet. Nann. Aze ema an dalh just a-walh ! Kompren a ran. Med ne vin ket paket ganeoh ken ! Ker a-walh 'm-eus paet ho komzou brao 'vid ar pezh zigason !

Fañch

Ar wirionez 'zo ganeoh, Frazi. Gwelloc'h 'vije dezañ lezel ahanoh trankil, pa gonzen dezañ tuchantig ha pa laren ar vuhez haro 'poa bet gantañ. 'Gozig mez e-noa.

Frazi

E-giz ma larit, ya ! Ar vuhez haro 'm-eus bet gantañ. Ya, unan galed 'm-eus bet gantañ. Med 'kichen ar pezh em-eus bevet ganeoh, e oa c'hoaz ar baradoz ! An hini falla 'tuez an dud 'oa war an douar, pe d'an nebeuta an hini feneanta ! Da gonta koñchennoù oah, pe d'an nebeuta an hini feneanta.

Fañch

A ! A ! Med c'hwi 'peus laret "ya" din kouslkoude ha c'hwi 'peus choazet ahanon. Soñj 'peus euz an devez pa oa avel fol hag e oam on-daou tal-ha-tal dindan ar wezenn dero ? Soñj 'peus penaoz en em dommeh ouzin ha penaoz 'ouien konta istoriou deoh ?

Frazi

Istoriou, ya ! Dalet on bet gand hoh istoriou a-viskoaz oh bet mad da gonta istoriou. Hañ, eun tamm kaoh tomm, setu ar pezh oh bet a-viskoaz.

Fañch

Frazi !

Frazi

Frazi ! Setu toud a pezh a ouieñ lared ! Frazi ! Ha paket ar paour-kêz Frazi

eur wech muioh ! « O ! ne ya ket mad an traou ganin ar mintin-mañ. N'on ket evid sevel ar mintin-mañ ! Diskenn ra ma gwad em zreid ha trei a ra ma fenn. Me 'garfe kaoud eva ma banne kafe mad gand bara-amann a-raog sevel. » « Frazi ! Oh ober glao ema, hag o trouzal 'noa an arneo. Daoust hag- 'eñ 'zo moyen deoh mond da gerhad ar zaout ? Ma hoz broñchid a zegas pistigou din amañ ! Moyen 'zo deoh mond, ma yarig ? » Hag ar yarig, trempet 'giz eur honikl, o krena dindan an arneo, a zegase he saout d'ar gêr, gleb-dour hag o krena evelti !

Fañch

Edouard, grit eun dra bennag, lakait anezi da zerri he beg 'ta !

Edouard

Paz ! Interesant tre eo pez a lar-hi !

Frazi

Da zul ha d'ar goueliou, eñ dirag ar hontouer, aze 'veze klevet. Ne veze klevet nemetañ zoken. Ne oa nemetañ hag a gaozee ! Ar sevel chatal, al labour-douar, an hoñvers, an iñdustri, ar bolitikerez hag an argant... gand e dreid en e zao war an daol e-kreiz an ostaliri hep saotra tasad 'bed ! Evid se, 'oa solud. Med d'an noz, pa oa kichenn distrei d'ar gêr, ne veze ket ledan a-walh an hent evid e baoiou braz hag e zivesker gil ! Piou a zigase anezañ d'ar gêr ken mezo hag eur porhell ? Ha piou oa dao dezi tenna anezañ 'mêz ar foz ha stleja anezañ war he hein ha da ziskarga anezañ 'barz e wele ? Piou oa 'ta ? Larit din 'ta ? Piou oa eñ ?

Fañch

Frazi an hini oa !

Frazi

Hag e oa, ya ! Frazi, ha c'hwi 'peus lezet 'pad pemzeg vloaz da veva er purgator !

Uget

Ma Doue ! Ma Doue ! Abaoe an amzer emañ o huñvreal euz ar mare-mañ, boud etre divreh eur paotr, ha kaoud 'nezañ 'barz ma gwele ! Pa zoñjan 'barz an traoñ, gand ma hoar e paseom toud ar sizuniou o vrodi dirag ar prenest hag oh ober tapisiri da zul da noz. Ni a zo bugale Vari ! Ar baotred a gave 'hanom re iriuz ! Gouestlet d'ar Werhez ha da jom gwerh, ha nompaz d'ar halh ! N'om ket deuet 'benn da zimezi biskoaz. Koulskoude e ouiem dañsal. Desket 'oa bet ganeom hag er wriadeg, ti ar seurezed, desket 'oa bet deom ivez d'ober tapisiri 'vid ar wriadeg, med n'eo ket mad 'vid ar bal ! Neuze e tañsem etre c'hoarezed... Etre c'hoarezed, ti ar seurezed ! Med netra ne dalvez eur gwaz memestra !... Da zul, 'pad an overenn hag ar gousperou e kanen gand ma choar : "D'an neñv, d'an neñv, ez in da weled anezi..."

Vichy-Fraise

Nann, paz 'mod-se, Dimezell ! En em lezit da vond ! Na dorrit ket ar ritm !
Me 'gonduo 'hanoh ! Kaoud fiziañs ennon. Redet am-eus toud ar baliou war
ar mêz, ha frotet 'm-eus leur meur a zal-dañs, a-raog mond da jañdarm ! “An
dañser mondian” 'veze greet deuston ! En em lezit da vond ! Kanit 'forz
petra, med ne dorrit ket ar ritm.

D'an neñv, d'an neñv, d'an neñv
Ez in d'e weled eun deiz !

Uget

O ya ! Mar plij !

Vichy-Fraise

En em lezit da vond ! En em lezit da nijal ! Boued ar spered eo ar muzik,
hag evaj ar horv eo an dañs. Leuniom or horv hag or spered !

Uget

Pebez geriou brao !

Vichy-Fraise

Evit ma geriou brao !

Uget

O !

Vichy-Fraise

Hag eh evin d'ho muzellou !

Uget

O ! O ! O !

Vichy-Fraise

An amzer-pad n'eus ket ken anezañ ! An ehonder ! Hag or horvou e-barz
an ehonder ! Hag ar muzik ! Netra nemed ar muzik ! En em deuzi a reom en
traou, an eil gand egile, an eil dre egile, an eil 'barz egile - per ipsum, ad
ipsum...

Uget

Med c'hwi 'zo bet beleg, c'hwi ?

Vichy-Fraise

N'on ket bet... med biskoaz n'on ket beo koulskoude.

Uget

Med c'hwi 'zo barz !

Vichy-Fraise

N'eo ket me, med ar varzoniez ! Ar vazoniez, dimezell, ha gand ar varzoniez e vez greet ar barz !

Uget

C'hwi 'zo eun debocher merhed !

Frazi

E ! ar re-ze, an daou-ze hag a zo aze kov-ha-kov aze. O rei skwer fall d'ar vugale !

An tavarnour

E gwirionez 'laran deoh : ma ne deuit ket heñvel ouz ar vugale-ze, ne vo ket digoret deoh rouantelez ar baradoz.

Frazi

Serrit ho peg, c'hwi ivez.

An tavarnour

Opala ! Setu unan a blij din ! Abaoe an amzer emañ o klask eur femelenn 'giz homañ. Plijoud a rit din, c'hwi. Hag hini 'bed euz ho kwazed n'eo deuet a-benn d'ober eur plah eüruz diouzoh ?

Frazi

Petra a larit aze ?

An tavarnour

E laran deoh, 'maoh ket bet eur plah eüruz !

Frazi

Eur vez eo gweled eun ti ken digempenn ! Piou 'zo karget da lakaad urz amañ ?

An tavarnour

Hañ ! Piou 'zo karget da lakaad urz amañ ? Me ! Med piou 'zo o lakaad dizurz ? Aze ema an dalh !

Frazi

Sikour !
Med diskouezit oh gwazed !

An tavarnour

Ma vije bet gwazed, ne vije ket bet merhed e-giz homañ.

Frazi

Fañch, divennit ahanon 'ta, Fañch !

Fañch

Me !

Frazi

Edouard ! Deuit da bilad 'nezañ 'ta !

Edouard

Pilad 'nezañ ! Ne vez ket pilet an dud war hent ar baradoz !

Vichy-Fraise

Ale, hop ! Deom dezi !

An tavarour

M'ho-peus c'hoant mond d'ar baradoz, ma flah, 'vo red deoh cheñch penn.
Ne vez ket digemeret eno pennou trist.

Fañch

Eur sapre diaoul eo ar paotr-mañ.

Edouard

Me 'zoñje a-walh 'oa tres fall warnañ !

Fañch

An dud hag a vez o terhel ostalirioù n'int ket tud rekomandabl !

An tavarour

En em lakait da zoñjal en huñvreoù ho-peus greet tra ma oa ho taou gwaz
inosant o lonka kement ha ma hellent !

Fañch

O ! c'hwi !

An tavarour

Stankit ho peg !

Frazi

Ya, stankit ho toull !

An tavarour

E ! Kemerit hemañ hag evit hemañ a raio vad deoh.

Edouard

O ! O ! Eur vez !

Vichy-Fraise

A ! Jezuz pegen braz eo
Plijadur an ene
Plijadur an den mezo
Dindan ar varrikenn.

Fañch

Ma gwreg 'ni 'maoh o tibocho aze !

An tavarour

Plijoud 'ra dezi.

Fañch

N'eo ket gwir.

Frazi

Eo ! Gwir eo e plij din !

Fañch

Biskoaz 'm-eus bet gwelet ahanoh dirollet e mod-se !

Frazi

Deoh e oa da lakaad ahanon da veza !

Fañch

E beñ... !

Frazi

Perag 'm-eus ket anavezet ahanon a-raog ?

An tavarour

N'eus netra parfet war an douar, ma dousig !

Edouard

Ha me hag a zoñje din am-oa eur vaouez direbech !

Fañch

Me ivez !

An tavarour

N'eus nemed en neñv hag e kaver traou parfet.

Frazi

A ya ! En neñv !

Sant Per

Netra da lonka amañ ? Netra da lonka ? Bretoned 'zo amañ, pe betra ? A ! Chouchenn 'm-eus c'hoant ! Med peleh 'ma ar chouchenn a wechall ?... 'Peus ket anavezet c'hwi an amzer-ze ! Karrigellou leun eo a veze karget, roll-diroll an eil war egile 'barz ar garrigell a gase anezo. Plijadur 'veze o tond da charread dre amañ ! Paotred solud ! Ha merhed ! Plijadur 'veze boud o gwaz ! Staota 'ree ar barrikennou da leunia ar botou-koad ! Hag e strinke ! Gast ar hast ! Med ar bulldozer hag ar poell-mazout o-deus cheñchet toud ! N'eus nemed hentchou nevez hed-ha-hed ar mor du, kreizenn nukleel, peulioù elektrik, paotred-saout elektrik memez gand saout trist 'kreiz ! Netra 'med saout ! Netra nemed saout-lêz ! Re a zaout ! Re a zaout-lêz ! Re a lêz ! Re da horo !

Fañch

O ! Sant Per ! 'Faota ket lar droug diwar biou-lêz !

Sant Per

Perag 'ta ? Kement-se e blij deoh al lêz ?

Fañch

'Ra ket. Med marhadour-saout 'oan euz ma micher. Diwar-goust ar zaout 'm-eus gellet beva ! Se 'zo kaoz !

Sant Per

Bremañ p'emaoh maro n'ho-peus ket afer deuz ar zaout ha deuz al lêz ! 'Peus ket c'hoant mond d'ar baradoz evel ar vugale vihan, eo ? Delit ! Evit euz hemañ !

Fañch

Petra eo ?

Sant Per

Eur banne remoñtañ. Ha neuze, prest an dud da zond, rag ouspenn eun davarn a zo d'ober c'hoaz fenoz ! Ale ! Toud an dud 'barz ar garrigell ! Ale opala ! 'Barz ar garrigell ! Ale buan !

Fañch

O che ye ye, penaoz e rim on-daou 'vid mond d'ar baradoz bremañ ?

Edouard

Perag mond d'ar baradoz ?

Frazi... **Fañch**

Frazi ? **Edouard**

Ya Frazi 'zo eet. **Fañch**

Ha neuze ? **Edouard**

Ma... **Fañch**

Ma divesker... Peseurt devez om hirio ? **Edouard**

Ar zadorn. **Fañch**

Edouard
Ar zadorn ! O ! ya ! Da zadorn ema bepred 'mod-se ! Toud an dud a ya kuit, ha me a jom amañ !

Fañch
Marteze e teuio merhed all ?

Edouard
Sur e teuio merhed all. Huñvre toud ar merhed eo mond d'ar baradoz ! Eno 'vez debret avalou, hag e vez kavet naered-wiber gouest da gaozeal.

Fañch
Marteze 'vo unan da bignad war veg eur skeul abalamour d'eur yar hag he-do en em lakaet da glochal ! Pe neuze unan a vo du-pod ha grehellet !

Edouard
Ya, du-pod ha grehellet 'giz Frazi ! Hag e teuio yaouank ha koantig pa en em gavo etre ma divreh hag en em lakaim da zañsal...

Fañch
'Ouezit ket dañsal gwall-vad, c'hwi !

Edouard
Piou 'n-eus laret an dra-ze deoh ?

Fañch

Frazi.

Edouard

Ne oa ket dao dezi mond da gonta traou e mod-se memestra !

Fañch

Edouard ! Ha ma ne vije ket Sant Per an den-ze ?

Edouard

Petra 'lak ahanoh da gredi se ?

Fañch

Ma ! 'Ouiian ket gizioù ar pagan war e gomzou !

Edouard

Ha ma vefe bet an diaoul !

Fañch

'Oulier ket !

Edouard

E ! nann ! Ne ouier ket !

Fañch

Marteze e vefe red mond da weled !

Edouard

N'eus ket pres warnom ! Peseurt devez om hirio ?

Fañch

Ar zadorn pe al lun kentoh.

Edouard

Al lun. Gweled 'rit, mond a ra an traou gwelloc'h ! Tra vrein, Edouard ! N'oh nemed eun dra vrein ! P'ema Frazi o poania noz-deiz da lakaad overennou evid diskuiz hoh ene... Ha c'hwi a jom amañ. Ne lonkoh ket ken. Da veurz e komañsan da gaoud sehed. Ha da verher, devez he deiz-habloaz... Ya, ma gwreg 'zo bet ganet da verher. Da yaou en em zantan gwelloc'h... ha da wener : distiñget. Mond a ra. Mond a ra en-dro. Da zadorn ! An divesker ! An divesker ! Azeza 'ran war ar leurenn 'vid diskuiza eun tammig. Kloza 'ran ma daoulagad, digori 'ra an nor...

Sant Per

Den ebed evid ar baradoz ?